

11.

Skuillit bennoz var peb hini
 A zikouraz sevel ho ti,
 Henn ho buez, var ho maro
 Kemeret soursi anezho.



GUERZ SANT-IANN AR FOUILLEZ

DISKAN

*Ni oll Kristenien ar fouillez,
 Varzu enn-hoc'h ha zeb hor Mouez
 Karet hoc'h ^{bet} gant hor Zalver
 C'hui zo profet, c'houi zo merzer.*

1.

E-touez bugale ar merc'het
 Biskoaz nikun bet kavet
 A ve brasoc'h eget Sant-Iann ;
 Jezuz hen lavar he-unan.

2.

Iaouankik c'hoaz el lec'hioù gouez
 Hoc'h bet kaset gant ann Elez,
 Pell diouz an dud, tost da Zoue ;
 C'houi jomaz pur, korf hag ene.

3.

Na rust eo bet he binijen,
Kroc'hen kanval enn he gerc'hen ;
Biskoaz na guin, na tamm bara ;
Grizioù c'hoero evit beva.

4.

Dre nerz ho mouez, eil Eliaz,
Ann desert oll a dregernaz,
Kalz pec'herien deuz d'ar Jourdin
O skei gant keuz var ho feultrin.

5.

Setu Jezuz, salver ar bed,
O tont da veza badezet :
Enn eur grenn, Iann vadezour
Var benn he vestr a skuil an dour.

6.

Ma krenit dirak mestr ar bed,
Dirak ann dud ne grenit ket,
Tavit, tavit, tud digaloun,
Ar profet braz n'oar ket kaout aoun.

7.

« Selaou, Herodez, te ra fall
« Derc'hel ganez pried eunn all ;
« Varnhot, varnhi, hag eb dale
« E pouezo dourn justiz Doue. »

8.

Eur c'hreg gant he mere'h danserez
A reaz deoc'h hu koll ho puez
Malloz d'ann danz ha d'ar visou
Goad hag ifern ouz ho zeulioù !

9.

He benn santel zo digaset
Var eur plat e-kreis ar banket :
Sell ouz penn Iann, Herodez kriz,
Ar penn-ze a veli noz-deiz !

10.

Mervel zo berr, dir ar c'hleze
D'ar merzer eo alc'houez an Ee,
Na c'hui zo kaer e lez hon Tad,
Badezour badezet er goad !